

CANTIK SANT ALER

Var don : Kalz amzer am beuz kollet.

1

Aeled euz ar Baradoz, oll sperejou euruz
Ch'ui pardonnerien devot, tud leun a feiz nerzuz
Unanit ganomp ho mouez, da veuli sant Aler
A neuz bet digant Doue grasou braz peb amzer.

Diskan

O Sant Aler beniget, c'hui a bedo Doue
Evidomp hag evit Breiz, evit ho pugale.

2

A gartel Limoj savet, kelennet gant soursi,
Desket d'hezhan bihannig clask Doue ha zenti,
Ar c'houadur a zeu buhan den fur ha parfet braz ;
Dre ma avanse en oad, he vertuz a grescaz.

3

Ty eur mecherour leal, oa casset sant Aler
Da ziski buit marechal pe guel armurier ;
He zeveriou a gristen, penn-da-benn a heuille ;
Evel an oabl glaz oa pur, he galon, he ene.

4

En illiz, en œuvrou mad 'tremene he zuliou ;
Var he labour d' ar pemdez, d' ar verrat he boaniou
E kinnige da Zoue euz he dal ar c'huezen ;
He labour e guirionez oa bepred eur beden.

5

Meuli douthon ar furnes, ar røue pa glevaz
Labour princiuz d' ober, dezhan a zigassaz
A danvez oa eur pezh aour, metal euz ar c'henta,
Vit tailla da Zagobert eun trøn euz ar c'haera.

6

Gant Doue sklereet Aler, ijinus ahend—all
Eleac'h eun trøn a ra daou, euz ar memez metal.
Dagobert oll estlammet o velet al labour,
Ractal a gemer ar zant 'vit kenta mecherour.

Respetet gant an oll bobl, e garg-se ken neve
 Dont a ra da vuit e ber cuzulier ar Roue ;
 Roit a zo dezhan eun ty, eun niver a vadou,
 He oll vad a rann d'ar paotr evit ho ezomou.

'Kreiz kemet a enoriou, he galon oa bepred
 Distag euz ar vanite, memen euz ar pec'het.
 An humilite guirion na gar ket enoriou,
 Ha Sant Aler a glaske kuza he vertuziou.

Dilezel a reaz ar bed, 'vit n'em roi d'ar studi ;
 He skiant ebars nemeur oa scler da bep hini ;
 En despect d'he vodesti, eo gret escob Noyon,
 Ag ar zant a jom bepred dous hag humbl a galon.

Gouarn a rae escopti gant eur santelez vraz,
 Beteg devez he varo ken humbl evel biscoaz.
 Da zec vloaz-ha-triugent, carget a veritou
 E quittaz an draonien-ma evit mont d'an Envou.

Dour a feunteun ker brudet en deuz galloud meurbed
 Da brezervi ar c'hezec euz goalheur ha clenved,
 Pedomp eta sant Aler 'vit al loened labour,
 A zo carget deiz-ha-noz gant Doue d'hor sicour.

Kerzit Breizis, ma breuder, kerzit en hann Doue,
 It da chapel sant Aler, it' ta heb digare.
 Da c'houel sant Yan-Badezour, devez he bardon braz,
 C'houi o pezo diganthan grasou ha grasou c'hoaz.

Ha c'hui pennou-tiegez, bem noz ha bep mintin
 Da breservi ho kezec, pedit ho medicin.
 Sant Aler evit an oll — labourer, mecherour.
 En deuz bepred n'he galon carantez ha sicour.

Permis d'imprimer :

Quimper, le 15 Juin 1880.

DU MARHALLACH, *vic. gén.*